

392

Bocen Elliant.

(212, suite)

Tre Langolen hac ar Faouet
Eur Bars santel a so cavet .

(213)

En deus laret d'ar Faouediz :
« Læqit un oferey hep mis,
» Un oferey en hoc'h iliz .

Êt ar vocen a Elliant
Hoquen ne get êt hep forniand
Êt so ganti seiz mil ha cant .

E brö Elliant, hep laret gaou,
Eo disqennet an ancaou :
Maro an oll dud, nemet daou .

Un intanvez tri-ugent vloa,
Hac eur mabie hebqen edoa .

En Elliant, plaç er marc'hat,
E cavot yeot da falc'hat,

Nemet en hentec sus ar c'har,
A gass re varo d'an douar .

(214)

Tri vije 'r galon na voelje
E brö Elliant nep a vije .

Golet trivac'h car tal 'r veret,
Ha trivac'h all c'hoas o tonet .

Les'h voa nao mab en euy tiad,
E yent d'an douar en eur c'harad .

O zad adré'n o c'houibanard,
Collet gantàn e sqiant vad .

Hi a youde a c'halve Doue,
Ruillet e voa corf hac ene .

(215)

« Ligit va nao mab en douar,
» Ha me roi dèc'h ur gouris coar .

» A rai diou dro da dro ho ti,
» Ha pèvar eus ho croes all-t. hi .

» M'em boa nao mab, an boea ganet,
» Ceta gant an ancou int èt .

» Gant an ancou oc'h toul va dor :
» Ne meus den d'hul din ul lommic dour !..

Leuy eo 'r vèred bete 'r murion,
An ilis betec an treujou .

Ret eo benniga ar parcou,
Da lacat enno ar c'horfou .

Me vel 'tal ar vèred un derven,
Staguet en e beg ul lizer woen .
Èt ann (1) oll dud gant ar vocen .

fin .

(Vol. IV, p. 212-215)
19 str. numérotées .

Ceci doit être pris au
Bargaz - Breiz (édit. de 1839),
à moins que le texte n'ait été
donné par La Villem., mais
ce n'est pas indiqué .

(1). - Le ms. de Lédan porte : amy .